

Cantic ar Barados.

DISKAN :

Barados dudius

Bro ar zent eo va bro.

O pegen eürus

E vezimp eno ato !

Eus ar bed-ma poanius

Peur e zin-me d'an Envou !

Pell diouzoc'h, va Jesus,

N'eus nemet poan ha daelou.

O pegen glae'harus

Eo heva gant ar pec'het !

Peur eta va Jesus

Peur 'hellin-me ho kuelet !

Nos ha de va Jesus

E Iavarán o vouela :

Peur er bed-ma poanius

Echui va heur diveza !

Skuiz ha melkoniet

En draonien-ma a zaelou

Plijet Jesus plijet

Va diguemer en enyou !

Neuze e tremeno

Ar boan, ar spont, an anken.

Neuze me a gavo

Ar peoc'b, ar joa da vilken.

O peoc'h ba joafisted,

Va Jesus o va Doue,

O pebeus eürusted

Epad an eterñité.

INDULJANZ AR MARO MAD.

Hon Tad Santel ar Pab hen deuz bet ar vadelez da lakat Induljanz braz ar maro mad kalz sesoc'h da c'hounit. Peb hini a chello breman gounit an Induljanz-se, epad zoken ma vezo c'hoaz var he yeched, hag e talvezo dezhan a benn ma rento he ene da Zoue. N'euz ken d'ober nemet mont da govez ha da gommunia (d'an deiz ma karer) ha, goude beza kommuniet, kana pe lavaret devot ar beden-ma :

Ton : *Elez eitz ar baradoz.*

O ya Aotrou, ya Doue, n'euz forz pe seurt maro

A garot choaz evidoun, me fell d'in hen reseo ;

Euz ho tourn, a greiz kaloun, m'en reseo a-vrema,

Gant holl anken ha poaniou va amzer diveza.

